

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

42. PERSOUN LESKOAT HA JEANNE AR GALLIK

O vont d'ar foar d'ann Huelgoat
me renkontraz persoun Leskoad
a ginnig din eur voutaillad
ha me reaz dezhan eur podad.
ma oe adjuget ar marc'had :

- Fanch Moizan, laz Jann ar Gallik
m'es grai a gant skoet pinvidik
- vit ann dra ze (me) ne rinn ket
koumer din diou veach e ze bet,
bara he zad am euz debret
Persoun Leskoad a lavare
da Jean ar Gallik eunn deiz a oe :

- Jeannik ar Gallik, va c'hoar gaer garet
digasit ho kwele d'am c'hampr
pa vo eet ho pried d'ar marc'had,
ni iel hon daou enn eur gwelead.
- evit ann dra ze ne rinn ket
respeti va fried a ze dleet.
Persoun Leskoad a zo fachet
o veza ne deuz out-han sentet
Jannik ar Gallik a lavare
na d'he fried paour eunn deiz a oe :

- Va fried paour, mar am c'heret
ouzin a dra vad e sentfed :
kasit va breur belek euz ho ti
pe ma ne rit me zortai.
- Jannik ar Gallik, va fried oc'h,
ne ra nemet farsal ouzoc'h.
Tremenet atao diout-han
c'houi vezo welloc'h anezhan.
- Ne deo ked farsal eo a ra
rak gourdrouz a ra va laza.
Persoun Leskoad a lavare
da Jeann ar Gallik eunn deiz a oe:

-Janik 'r Gallik, me meuz klevet
eo ho tad nouet, sakramantet,
abaoue diziou tremenet
- Janik Gallik a lavare
na de fried paour enn dervez-se :
- va fried paour, ma nam c'hirit,

- 114 -

da welet va zad ganen deuit,
a zo nouet, sakramantet
abaoue diziou tremenet.
- da welet va zad ned-in ket
da charreat mein /glaz/ me rank monet.
kasit ho matez vihan ganeoc'h
hi a rai kompagnunez dehoc'h.
e bord ar c'hoad pa zint erruet
ar vatez he deuz lavaret :
- petra zo a nevez er c'hoad-mañ ?
ne ra va goad nemet krena.
Va mestrez paour, ouzin sentit
hag ac'han d'ar gear (c'houi) distroit.
- vit ac'han d'ar gear me ne rinn ket
da welet va zad me renk monet
E ti he zad pa oa erruet
bonjour he deveuz lavaret,
bonjour ha joa er maner-man.
Va zadik paour, peleac'h eman ?
Klevet em euz ez eo gwall glañ.
geier, va merc'h, ac'h euz klevet,
rak evit klan me ne doun ket bet.
- Va merc'hik paour, ouzin sentit
hag er gear da loja choumit.
evit da loja ne choumin ket
va fried ganen a ve nec'het.
E bord ar c'hoad pint erruet
Fanch Moizan o deuz gwelet.
gant han eur vouc'hal daou bennek.
da Jean ar Gallik en deuz lavaret :
- Lavar da in manus pa giri
emoud aze e l'leac'h ma varvi.
- Fanch Moizan, n'am lazit ket
ha me roio dehoc'h daou c'hant skoet.
Digant persoun Leskoad n'ho po ket.
ar vatez vihan pe deuz klevet
e vije he mestrez lazet
d'he briata a zo lammet.
Fanch Moizan dezhi ro eur javedad
evit ma teuje d'he c'huitaat.
- va matez vihan, kea da laret
dar gear dan fried forsan° he vreur belek
In manus tuas, Domine,
Jezuz, kommerit va ene
hag hini va bugel ive.
hag hen skei gant-hi diwar he ...°
ken a welaz penn ann inosant
hag hen o c'houlenn badisiant
ha d'he varm baour ar sakramant.

° Ollivier a
lenn : forban.

° Ollivier a
lenn: flank(?)
Cf. Ernault,
Glossaire, p.239

(Persoun Leskoat ha Jeanne ar Gallik)

-Persoun Leskoad, didost aman
da vadezi ar bugel man.
- Pa zoud koumanset 'peurlazi
taol i aze el leac'h ma kiri.
taol i aze enn eur poull glaou
ha golo anezho gant deliaou
Persoun Leskoad a lavare
na da Fanch Moizan neuze :
- Kea brema da redek ar vro
pam vezo arc'hant me da baeo.
- Da redek bro me ne dinn ket,
da genta me rank beza paet.
Enn eun ostaleri ez int eet :
boutaillad o deveuz goulennet
N'oant ket koumanset da eva
ma koumans ar c'hok da gana,
oc'h ar ber eno o rosta.
Ann hostiz en deuz lavaret
eunn dra bennak zo erruet
p'en deuz eur c'hok rostet kanet.
N'oa ket ho banneou peurevet
daou archer en ti zo erruet.
e/ persoun Leskoat (ez) int kroget.
Fanch Moizan n'ho deuz lezet.
Persoun Leskoad a oe mouget
ha Fanch Moizan hevelep
Setu peseurt vad o deuz bet.

vvvvv